

Mar m'be me awalc'h a studi a spered da rima  
eur pluen gane em dorn a me prest da skriva

me a skrife eur reglet erve va santimant  
Chujet dan antretien en tre daou zen iaouank.

mas kent avans davantach c'houlenan azistans  
eus ar sperejou kaera kent evid dont d'he c'homanc'

Da rei d'am speret an allumier pa meus an okazion  
Da kompozi eur chanson erve va intansion.

Pa lennan em leor bihan, zo kalier ma studi  
me kav enon treo surprenabl pere a ra chagrin din

Pa lenan va flanedan skrivet sur gant va mestres  
Deus va brassa plijadur a ra din tristidiges.

Pa vezan me em jardrin mem bez kontantamant  
me a remerk eur fleuren a ioa ie a brillant.

*treffot (sans tête)*  
a ioa evel an diou (de) (1) ag an eol ardant  
Pini a deu da bara ebars er firmamant.

Onez a zo eur fleuren deus a valankoni  
Antreed eo don em c'halon diez bras da c'heffassi.

Prins, an oll amouroustet, Roue an oll dud iaouank  
Uanadou dre o sillou am rento langissant.

Kenta man boe an henor va mestrez d'ho koellet,  
e voa er porchet an illis goude an offeren bred.

Enon me o remerkas a c'hras ag a fesson  
a vizach a daoulagad ag ive a galon.

O tao ulagad a vrille evel an eol ardant  
Pini a deu da bara ebars ar firmamant.

O tiou chod rus o tal goën evel eun diamant.

Petra virje ouzin-m'he man deujen d'ho karet  
Pa zeo c'houi va mestrez rouanez an oll plac'het.

O kened sur va mestrez a plij d'am santimant  
O furnez o modisti a rent va halon kontant.

Mar plich gant va doue, mar deo e vadelez  
E deufe va genet da plijout dam mestrez

Va furnez va modisti da plijout d'he faltazi  
Va rento e halon kontant pa parlantin gati.

An eil goec'h mane goëlis assuri e halan  
e voa ebars an ilis bed e komunian.

e c'hober e fask kenta e mesk ar vugale  
Dar poënt-se a voa iaouank a me a voa ive.

neuze deuis da zillezel va edukation  
evid dont da attreteni deus a greïs va halon.

evid dont da attreteni rouanez an oll fleuriou  
eus a gaeran fleuren a zo er jardrinou.

Onez zo eur fleuren eus a velankoni  
Kaeroc'h evid flourdrilis ag ive rosmani

a mar deu dezi goënvi assuri e allan  
Nag a lakeï va halon var ar plas da ranan.

An eil de a vis eost e lakis em speret  
Ag ive em faltazi mond da vellet merc'het

mond da vellet va mestrez rouanez va halon  
Va oll dezir er bed man va inklinacion.

Debonjour dec'h va mestres en de deus a hirie  
gant eur galon barfet evel zo gane-m'he.

Gouskoude pe neur chonjan er pes zo dim' lavaret  
me a meus amzer gollet e dont do derempret.

— Sod e vec'h ma chervicher o donet da gredi  
Rag eur goal deod a deuio evid o separi.

Pa verc'h dispenet dime ker munut ag ar pel  
Se ne raffe ked dime donet d'ho dilezel.

Chenjit a prepojou treïtourez miliget  
Chagrin a ra dam speret pa klevan o komzou

Pa sellan e kallier va studi vellet o prePOCHOU.

Jannton PUIL, 9 juin 1851.

*Il n'y a pas de titre dans le ms.*

*(1) De, entre ( ) dans le ms. ; les mots : treffot (sans tête) sont ainsi écrits dans l'intervalle supérieur.*